



8N2-1-043

18

Itron-Varia 'Gelou Mad,
Pa stardo re grenv an nec'h,
Ni teuo gant hor c'halonad
Evit kaout ama divec'h.

19

Daou elik 'nij a-uz d'ho penn,
Digor braz ho askellou,
Prest da zougen d'eomp, en anken,
An dudiusa kelou.

20

Ha c'hui sant Laurans, hon Aotrou,
A vervaz en hoc'h eskern,
Ar mel dre c'hrouez ar flammou,
Hor miret euz an Ifern!

21

Euz relegou ho korf santel
Pa 'zeo guir hon deuz bet perz,
Grit perz c'hoaz d'eomp en ho chapel
Euz ho sikour, euz ho nerz.

22

Gant eur fulen euz ho tan kri,
C'houezit krenvoc'h en hor c'hreiz,
Betek he lakat da virvi,
Feiz koz hon tadou Bro-Vreiz.

PERMIS D'IMPRIMER :

*Quimper, le 14 Mai 1901.***F. CORRIGOU,***Vic. gén.*

Kemper, moulet-e ti de Kerangal.

CANTIK SANT LAURANS

HAG

ITRON VARIA 'GELOU MAD

1

Var zouar Goulien a veler,
Tost, en daou du, d'ar mor braz,
Tour eur chapel a bign seder
A greiz ar guez d'an oabl glaz.

Diskan :

Sant Laurans, c'hui dreist oll Mari,
C'houezit krenvoc'h en hor c'hreiz,
Betek he lakat da virvi,
Feiz koz hon tadou Bro-Vreiz.

2

Da zant Laurans eo bet savet
'Vit reseo he relegou;
Abaoue ouспен tri ganved
A bed en-hi hon tadou.

3

O velet eur chapel ker koant,
En-hi ken beo ar beden,
D'ar Verc'hez Vari 'zo deuet c'hoant
Da gaout en-hi eul loden.

4

Hag oc'h en em denn' en disvel
Sant Laurans a roaz he dron,
Hag ar' plas kenta er chapel
D'ar Rouanez hon Itron.

5

An henchou doun, toulllet er roz,
A ziskuez eo a bell 'zo
Darempredet ar chapel goz
Gant parrezioù tro-var-dro.

6

Heuliomp mad ar rondou santel
Ho deuz merket er reier
Troid gallouduz tud Breiz-Izel
Treuz-didreuz, el lenneier.

7

Tud Esquibien ha tud Beuzec,
D'ho tadou c'hui 'rafe poan,
Ma ve guelel ar spenn dreinek
Hed an hent-man o tiyoan.

8

Aman 'oa 'vit-ho eun dudi
Dont gant feiz ha fizians,
Evit kana ho meuleudi
D'ar Verc'hez, da zant Laurans.

9

Itron Varia 'Gelou Mad,
N'ho peuz-hu c'hui ket guelel
Aman o pedi tad va zad
Ha mamm va mamm daoulinet ?

10

Sant Laurans, o merzer nerzuz,
C'hui ho peuz desket d'hor gouenn
Kerzet dindan bec'hiou poanuz
Var-zu an Envou, laouen.

11

Aman, e amzerioù tenval,
Oll dud ar vro a ouelaz,
Pa velent morzolioù tud fall
O tiskar d'an traon ar Groaz.

12

Mez, evel eur vezen galed,
A jom pell beo he grizioù,
Adarre kroaz Salver ar bed
A zav var hon douarou.

13

Evel-se dalc'homp stard d'hor Feiz,
Greomp ma poulzo donnoc'h-don,
En despet d'an avel direiz,
He grizioù en hor c'halon.

14

Diou feunteunik a zav aman,
O redek hed ar prad glaz,
A ra d'an douar bleun en hanv
Ha delioù fresk d'ar guez braz.

15

Mez euz an Env ped eienen
A zav didrouz ha dre guz,
Var an Eneou a zisken
Hag a skuill dour burzuduz !

16

Dour burzuduz, dour a vuez,
A laka en eneou
Da zével bleun, delioù ha frouez,
Bleun ha frouez ar vertuzioù.

17

Ia, chapelik koant an dorgen
A-uz prajou an draonien,
Gant da groaz, da zioù eienen
Ni da garo da viken.